

Ivantor ilis an Ergue-Vraz

Er bloa 1906, d'an 2 a viz Meurz.

Var don : Kantik santez Anna.

M'ho ped, Spered Santel,
Deuz a lein an Envou ;
Tollit varn'hon eur zell,
Roit d'in ho krasou.

Diskan :

Henor d'an Ergue-Vraz !
Eno zo tud kalet
'Vit difenn ar groaz,
Deuz ar Franc-Maçonnet.

C'hui sant Charles, m'ho ped,
Dre ma zeoc'h, va faëron :
Kennerzit va spered
Ha tommit va c'halon.

Roit d'in an talanchou,
Pere am euz ezom ;
'Vit displeg 'n torfejou,
Erruet er c'hanton.

Dre urs 'n otrou Prefet,
Kerkent ha goulou de ;
'N iliz dle bea kelc'het,
E bars bourc'h an Ergue.

Dre ma oa eun torfet,
Ar pezh en oa d'ober ;
Abred oant partiet
Deuz ar gear a Gemper.

Ar jandarmetennou,
'Nem lakaz da garga ;
Dirag mauer 'r c'hleuziou,
'Vit mont buanoc'h c'hoa.

'Vel eur bouted kelve,
O gulet oa eskamm ;
Entrel e bourc'h Ergue,
Oll oant dre an daou lamm.

Adjutant ar c'harter
Me a gred o lakaz
Pemp kichen peb skalier,
O zabrinnier enn noaz.

'Rog m'erruent e kear,
Oa klevet eur c'horn-boud ;
Ha monez trist ar c'hleier,
Evit ober da c'houde.

Tud a feiz, a galon,
'Vel poulzet gant 'n avel foll ;
D'anzao ho religion,
Ielaz 'n iliz 'n eun toll.

« *Si vis pacem para bellum* »
Rackal an noriou oa preñnet,
Ar reze oa komzou Samson,
Pa gombattaz ar Philistin.

Groaget Kerfrez ha Lezergue,
Vije stropet gant eur jaden,
A kunduet da Gemper goude,
Pa nefe urs ar c'habiten.

Klasket 'n oa mont er vered,
'Vit sicour ar re all ;
Goude ma oa bed kelc'het,
Dre urs an dud fall.

Koueza rê kalzik glao,
Pa nem gavas ar c'hontroller ;
Gant daou zen guisket divalo,
Hag ive eur c'hommissair.

Daou gantonier oa prezant,
'Vit servich da destou ;
Dre urs ar gouarnamant,
Gant aon da goll o flaçou.

Ne ket red beza difficil,
'Vit ober eur sort micher ;
Ober rankont soubenn vijil,
C'hoec'h real bemdez zo dister.

Neuze ar c'hontroller er penn,
Vel eur vanden tud nec'het ;
A yent da zispleg ho lezen,
Kichenn dor ar porchet.

Eno, a rankent silaouet,
Diou brotestation ;
Hini Jean-Marie NÉDÉLEC,
Hag hini, 'n otrou Person.

Bonjour, eme ar c'hontroller,
Me c'houl an nor digor,
Me zo deut a Gemper,
'Vit ober 'n ivantor.

Komzou 'n otrou Person.

Choazet oun gant Doue,
'Vit prezek he lezenn ;
Ne c'houzantin morse,
'N digor ne po biken.

Vel person ar barrez,
Me ra d'eoc'h eun ali ;
C'hui ra eur fallagriez,
Lako dichanç n'o ti.

Kalon po da brofani,
Ti redemptor ar bed ;
« *Potius mori quam fedari* »
Ne drec'hoc'h biken bretoned.

Meur a iliz zo bed ruiet,
Gant goad kristenien fidel ;
Neur gombatti franc-maçonnet,
O tifenn al lec'hion santel.

Herodias e noa goulennet,
Dre eun ali treitour
Vije laket var eun assiet,
Penn Sant Yan Badezour.

Sant Lorans, sant Sebastien
Hen doa gouzantet ar maro ;
Kentoc'h 'vit mankout d'ho lezen,
Breiz ra kalz henor dezo.

Ar prophet Isai, guechall,
Oa heskennet dre an hanter ;
Dre ma oa vel kallez all ;
Bepred fidel d'hor Zalver.

Ar vaouez Machabee,
Hag he seiz krouadur
Sant Eleazar goudeze,
Zo bed merzerien pur.

D'ar maro seurezed zo ed,
Hervez lavar an n'histor
Amzer Robespierre me gred,
Neur gana ar *Veni Creator*.

A viskoaz zo kombajou,
A viskoaz zo brezel ;
Ar c'henta oa en Envou,
Gant armee sant Mikel.

Pere hen doa kombattet,
Drouc-Elet Lucifer ;
Dre ma oant n'em revoltet,
A eneb ho C'hrouer.

Gant an intañvez Judith,
Ar general Holopernès ;
A oa dibennet e publik
Dre ma oa eur pañen didruez.

Tobi pa iez da gousket,
A oa ean den dispar
A benn ma oa divunet
E oa dall, pebeuz glac'har

Nabuchodonozor, eur roue,
Noa gred eur statue vras ;
Eur menik a berz Doue,
Kerkent er bruzunas ?

Galloud ar franc-maçonnet,
Zo ive memes tra ;
Ar reze vo diskarret,
Pa sonjint an neubenta.

Dre c'hraç ar brophetet,
Me a moa douetans,
C'hui piñe sicoured,
Dishenori ar Frans.

Var menez Sinaï guechall,
Oa lennet an Decalog ;
Me o ped da studial,
An deved artiel 'vit o lod.

Ar bloaveziou a dremeno,
'Vit skoazella eur seurt lezen ;
Ho brud fall bepred a jomo,
E touez ar bobl kristen.

Komzou Jean-Marie Nédélec

E hano Conseil ar fabrik,
Me lavar a vouez krenn ;
Hen desped, d'ar Republik,
Ni jomo kristenien.

Me lavar e brezonnek,
Ma fot d'eoc'h ivantori ;
C'hui peuz netra da veled,
Pep hini zo mestr en e di

Gant rezon ne c'houzantin ket,
Hon iliz gant he oll madou ;
Vefe estimet ha prizet,
Roët d'eomp gant hon Tadou.

Vel hon tud koz, ni vo fidel,
Lezomp a gostez hon anken ;
D'an iliz ha da Vreiz-Izel,
Oll tud Ergue savomp hor penn.

Na pegen kaër eo hon iliz,
Gant eun Tour-Mein kizellet ;
Aman koz ha yaouankiz,
Oll hen deuz tremened.

Sevel a ra dreist an douar,
He benn echuet gant eur groaz ;
Dreist an drubuil hag ar glac'har,
Guern burzudus kreiz ar mor braz.

Ped potr mad, zo bed guelet,
Hen amzer vrema ha guechall ;
Dre an nor-dal frank-digoret,
He tougen, baniel Sant Guinal.

Pep kristen mad vè joañs,
Pa vel deuz an Touriou ;
An dud ho tont niverus,
Vit assita hen offiçou.

Neur font, var zu joa an eured,
A ve klevet fors kalonou ;
Pe tristidigez ar vered,
O skei bep sort poulzadennou.

Dre ma oa da Zoue fidel,
E harzik, kear Babylon
Oa tollet ar prophèt Daniel,
Hen eur foz, e touez seiz lion.

Habacuc, den a galon,
Dre eur vleven, gant eun El
Oa douget beteg Babylon,
Vit kass boed da Zaniel.

Bèo a benn seiz devez goude,
Daniel a oa sortiet
Kenn souezet, oa ar Roue,
Ma oa nim gonvertisset.

Josue dre eur miracl dispar
Evit hirrad an de ;
Harpas an heol hag al loar
Evit avantach he arme.

Na pegen kaër oa guelet,
Euc'h, ar gearik Gabaon ;
An heol a oa harpet,
Al loar, euc'h Aialon.

Mar gallfe ar spered furchal,
Hag ar planedennou lennet ;
Sekrejou don ar vein guechall,
Vefe kurius braz da glevet.

C'hui rento kont, deuz an drama,
Da Zoue e traonen Josaphat
Pa sonno ar varn diveza
'Vit separi ar fall deuz ar mad.

Morse meuz gred mechantiri,
Na dam mam, na dam zad ;
Mez ma fot deoc'h ivantori,
Me a gred, c'hui po koat.

Neuze ar c'hommissair Judic,
A respontas he neur grenas ;
E hano ar Republik,
An nor vo draillet memes tra.

Daou zen, oa gant loc'hou,
Da heul ar c'hontroller
Evit drailla an noriou,
O min a verke skler.

O cheleten a oa re ver,
Na pegen striz oa o bragou ;
O roched, mad dar pillaouer,
A kalz re hir, oa o boutou.

Me gred a oant, offiserien,
Deuz, compagnunez an heol ;
Guech a glaskont an aluzen,
Guech labouront 'vit Per ha Paul.

Kerkent ma oa, eiz heur sonnet,
A gommanças an tolliou ;
Var dor an iliz binniget,
En desped d'an daëlou.

Me houlen var ma daoulin,
Oh ? pa zonjan, na tra iskiz ;
Ne velin mui eur sort krim
Drailha doriou hon iliz.

Eb respet vit ar re varo,
Hon neubeud jandarmetennou ;
C'hoant dezo dober o faro,
A zavas var ar beiou.

Neuze oa bed eur poulzaden,
Gant eun niver braz a dud ;
Ha forsaz a nezo da zisken,
Didrouz vel ma vijent mud.

Goude ma oa draillet an nor
Gant potred ar c'hontroller ;
A zonje dezo kaout digor,
Mez dustu oa eur voger.

Pa oa foeltred ar voger,
Int a sonje, oant potred vad ;
Mez, noa ket êchu an affer,
Goude oa treustennou koat.

Pa zonnas, kreiz te e kear,
E oant klevet, e houlen dour ;
Dustu oa ed eur messenger
Da Gemper da houlen sicour,

Raktal, ar Prefet Collignon
C'hortoz kelou, pad ar mintin ;
Re urs, da gass eur vataillon
Hag ar c'hommandant Quentin.

Pa erruas ar zoudardet,
Gant ho munitionou
Evit daou zavez ganto boed,
A me gred kartouchennou.

Ouspenn pevar hant a nezo,
Unan bennag, deuz ar barrez ;
Kazi oll, pa zonjent hen o bro,
Var ho bisach oa tristidigez.

Eun tapouliner oa plaset
Evit sonn teier abaden ;
Ar c'hommissair noa goulennet
Digor e hano al lezen.

Kerkent, vel eur messenger,
Ar C'honseiller general
Ha zavas var eur voger
Evit implori ha supplial.

« E hano, kristennien ar c'hanton,
Eme an otrou Servigny,
Me lavar a greiz kalon,
Potred kalet, poent eo echui ! »

Karet gant an dud a feson,
E gomzou oa silaouet ;
Ha memez 'n otrou person,
Noa truez deuz ar zoudardet.

Ar peoc'h, oa bed sinet,
Divezat deuz an abardae ;
Goude, ivantor e oa gred,
He Kerdevot ha Sant Guenole.

Eur jandarme, eb damanti,
E Briec oa bed gnelet ;
Pa oar ed da ivantori,
Kri e kenver ar merc'het.

Eur vedalen aour noa bed,
Ha memez unan militair ;
Hon neubeud tolliou var he veg,
Hag ar votez en e rêr.

An neb, a ve louz he fri,
Koulz en Ergue hag e Briec ;
Hervez ma lavar peb hini,
Ve hanved mec'hiek.

Henor da vreiz da viken
Diskouezet en deuz skler
E zint deuz gouen ar verzerrien,
Ha fidel d'hor Zalver.

Hon neubeud kristennien vad
Zo bed klozed er prisonniou ;
Dre ma noa dalc'het mad
O tifenn an ilizou.

PENNARUN hag ar GALL,
Deuz potred kalet Briec ;
Deuz Landelo oa eun all,
An otrou kure DANTEC.

E parrez Tourc'h, eur marechal,
Hag ar Roue oa chadennet ;
Evel ar zent, guechall,
D'ar prison oant kunduet.

Aotrou kure Langolen,
PIEDOYE, he hano mad ;
Dre ma oa stard d'he lezen,
Zo bed er prison, eur pennad.

Diskan :

Henor, da gristennien Arvor,
Koulz hen de hag hen noz ;
Int sur da gaout digor
Gant sant Per er Baradoz !

Eur C'hernevot.

(Tous droits réservés).